

**Hetoù Ofis ar Brezhoneg
14 a viz Genver 2005 – Breujoù Breizh
Prezegenn gant Lena LOUARN, Prezidantez.**

Itronezed, Aotrounez dilennet, Mignoned ker,

Niverus omp amañ fenez. Kalz a dud zo digarezet ivez hag en o zouez e venegin an Itron Bernadette Malgorn, Prefedez ar Rannvro, an Ao. Jean-Yves an Drian Prezidant ar C’huzul-rannvro hag an Ao. Jean-Pierre Thomin dileuriet evit ar politikerezh yezh, na oant ket evit bezañ ganeomp fenez, dalc’het ma oant gant emgavioù all. C’hoant am eus ivez trugarekaat Prezidant kentañ lez engalv Roazhon ha Prezidant an ARAP o deus roet an tu da OAB er bloaz-mañ c’hoazh da ginnig e hetoù el lec’h meur-mañ.

Emañ Ofis ar Brezhoneg, goude 5 bloavezh leun a labour war bep tachenn ha kefridi fiziet ennañ, o kenderc’hel gant e hent. War-zu an ofisielaat emañ da vont en un dazont tost. Un dra vat eo.

Fellout a ra din pouezañ avat war berzhioù zo eus an Ofis a vremañ a vo, n’eo ket hepken da virout, met da greñvaat.

Un hollad zo eus 5 servij an Ofis.

N’eus ket a ziorren hep arsellva, n’eus ket a dreiñ hep TermBret hag hep ar servij Glad.

Ret eo deomp eta kenderc’hel da ziorren pep hini eus ar pemp servij kentañ-se en doare kempouesañ ar gwellañ.

Soñjal a c’heller ivez e servijoù nevez.

Gant e skiant-prenet eo gouest an Ofis da vezañ efedus war dachennoù all.

Ar pevar lec’hiad a vremañ, a zo e pevar departamant disheñvel, zo da vezañ miret. Mennet omp da zigeriñ hor pempvet burev en Aodoù-an-Arvor e 2005.

Kement-se a dalvez e talc’ho an Ofis da labourat e servij an holl vrezhonegerien forzh pelec’h e Breizh. Goude-se e vo poent da soñjal en doare da vezañ e Pariz, mod pe vod.

Un dra a zo a bouez bras evidomp ivez eo ar mont en-dro e brezhoneg zo en Ofis. Unan eus an traoù diazez eo evidomp.

Penaos broudañ tud all da vont pelloc'h gant implij ar yezh ma ne roomp ket ni ar skouer o vont en-dro penn-da-benn e brezhoneg. Diskoulmoù teknikel a zo evit derc'hel da vont gant ar brezhoneg gant gallegerien.

Amañ e karfen ledanaat ar gaoz un tamm hag ober anv eus un dra a glever aliesoc'h-aliesañ. Ne vefe mui dazont ebet d'ar brezhoneg evel yezh kevredigezhel, evel yezh a zarempred naturel. Trawalc'h ha brav e vefe lakaat dezhañ un dazont a yezh sevenadurel....

Ur fazi bras e vefe mont gant an hent-se.

Da gentañ, ma n'eo mui ar pal nemet gallout lenn Asteriks e brezhoneg evel ma vez lennet e latin n'eus ket ezhomm tamm ebet da soñjal en ur politikerezh yezh evel m'eo bet degemeret a-unvouezh gant ar C'huzul-rannvro e miz Kerzu.

Trawalc'h lezel ar re a garo da zeskiñ brezhoneg, evel ma c'hallint, war o amzer vak.

Da eil ma komzer a sevenadur, da lavaret eo a c'halloud krouiñ, ne weler ket neuze, penaos e c'hallfe ur yezh, ne vefe ket mui tamm ebet ur yezh a vuhez kevredigezhel, penaos e c'hallfe ar yezh-se krouiñ traoù nevez.

Daoust ha sirius eo lakaat da bal nemetañ kanañ, adkanañ ha diskanañ traoù bet savet kant vloaz zo ?

Ma ne zeuer ket a-benn da virout ha da ziorren ur gwir gefridi a yezh kevredigezhel d'ar brezhoneg ez aio buan ar sevenadur brezhonek da hesk da heul. Ret eo kenderc'hel da labourat hep koll amzer evit aesaat implij ar yezh ha ledanaat he zachenn.

Kement-se a vez graet war ar pemdez gant an Ofis. Warlene hor boa bet ar blijadur da brofañ kartenn hent Breizh e brezhoneg d'ar re a oa deuet d'hon hetoù.

Er bloaz-mañ hor bo ar blijadur da brofañ deoc'h ur rummad pevar poster nevez kenembannet gant TES. Sur omp e vint deuet mat er skolioù, er c'hentelioù-noz hag e ti kement hini zo o teskiñ ar brezhoneg ivez. Profet e vo deoc'h fenoze pep a bakad pevar foster ennañ a-raok deoc'h mont gant ho hent d'ar gêr.

Emskiantek eus ar bern labour a zo war ar stern ha war un dro leun a fiziañs en dazont, ur fiziañs maget gant hon darempredoù a zeiz da zeiz gant kantadoù ha kantadoù a Vretoned war an dachenn. Setu hor stad spered e derou 2005. Kontañ a c'hellit war Ofis ar Brezhoneg evit ma vo ar brezhoneg, da vat, tra an holl Vreizhiz.

Lezel a rin bremañ ar gaoz gant an It. Mona Bras, kuzulierez-rannvro a gomzo en anv an Ao. Jean-Yves Le Drian.

Très bonne année à chacun de vous, bloavezh mat deoc'h holl, ha trugarez.